

Evidomp ac evito
 O! pedit deis ha noz,
 Ma tale'himp oll stard ato
 Da feiz on tadou coz.

— *Itron ar Chrann, etc.*

Tud fall, en ur mod iskiz,
 A ra hirio brezel
 D'or Mam santel an Iliz :
 Roit dezi scoazel.
 Ia, gant ho prec'h galloudus,
 Arpit pried ho Mab,
 Kennerzit Vikel Jesus
 On Tad santel ar Pab !

— *Itron ar Chrann, etc.*

IMPRIMATUR :

Corisop. 3^e die Novembr. 1896

F. CORRIGOU

Vic. Gén.




Desmoulins, Imp.-Relieur. Landerneau

CANTIC

Itron Vari ar Chrann

E parrez Spezet.



Ton : Patronez douss Montroulez.

DISCAN :

Itron ar Chrann, o ! Guerc'hez,
 Rouanez an Envou,
 C'hui 'zo ive rouanez,
 Mestrez or c'halonou,
 Mari, mam garantezus,
 Ni ho caro bepret,
 Bepret ni ' garo Jesus
 Or Salver benniguet.

— *Itron ar Chrann, etc.*

Ni a deuio d'ho chapel
 Gant guir devotion ;
 Dirac oc'h imach santel
 Ni ho pedo, Itron,
 Ha c'hui a ziguemero
 Peden ho pugale,
 Ha varnomp c'hui a scuillo
 Tenzor grassou Doue.

— *Itron ar Chrann, etc.*

Ni ho pedo aliez
 En on oll ezomou,
 Dreist oll en dristidiguez,
 Er boan, en ankenniou :

O ! grit na deuio biken
N'icun ac'hanemp-ni
Da goll ar fisians christen,
Ha da falgaloni.

— *Itron ar Chrann, etc.*

D'or bugaligou, Mari,
Abred ni a zesco
Ho caret oc'h enori,
Ha ni o digasso,
Ni o digasso ama
Guerc'hez, en ho kichen,
Ma tenoc'h d'o benniga,
O ! Mam ar Gristenien !

— *Itron ar Chrann, etc.*

Ni o erbedo ouzoc'h
Muic'h c'hoas, mam dener,
Pa deuint divezatoc'h
Da receo o C'hrouer :
En o c'halon c'hui ' zalc'ho
Ar grassou precius
Neve diskennet enno
Gant corf ha goad Jesus.

— *Itron ar Chrann, etc.*

Ia, mirit, Itron ar Chrann,
Mirit o eneou
Bepred pur, chast ha guen-cann
Eguis liliennou.
Ac evit ma vint ato
Deoc'h ha d'ho Mab fidel
Astennit noz-deiz varno
Guerc'hez sacr, ho mantel.

— *Itron ar Chrann, etc.*

Ha pa deuio an devez,
Devez leun a ankenn
Ma vo galvet, o ! Guerc'hez,
Or iaouankis d'an tenn,
D'ho chapel ni ' ziredo,
D'ho pedi, o ! mam vad,
Ha c'hui, neuze, or miro
Dious re vras calonad.

— *Itron ar Chrann, etc.*

Ha pa rankint d'an arme
Mont, da heul an drapo,
Neuze dreist oll, o ! neuze,
Mari ni ho pedo
Da zivoall dious peb danjer
O c'horf ac o ene :
Ken a zistroint d'ar g'er
Ni ho pedo bemde.

— *Itron ar Chrann, etc.*

Ni ho ped, o ! mam garet,
Grit eur sell a druez
Var or c'herent decedet,
Grit, dre ho madelez,
Ma zaint d'al lec'h a repos
D'ho cuelet, o ! Mari !
Da gana, er baradoz,
Deoc'h gloar ha meuleudi.

— *Itron ar Chrann, etc.*

Ho chapel, Itron ar Chrann,
Tro var dro ' zo brudet,
Tud memez eus pell ac'hann
A vez enni gullet :